

KELENNADUREZ,

*Var ar C'holera, great gand ar C'hon-
sail karget, en departaman, da rei
da anaoud ar pez so gwell da ober
evid en em zivoaleuz ar c'hlenved-se,
ha paraa.*

AR PEZ A RENKER DA OBER EVID EN EM
ZIVOAL EUZ AR C'HOLERA.

Ma n'hoch ket boazet da zebri na da
eva ré, na da zebri na da eva traou kon-
troll d'ar iec'hed, heullit ar bevans-se.

Rak se, arabad ev dibri frouez ha na
vent ket paô, hag ispisial avalou a
kestenn. Dilezit ar guin ardand hag an
oll likeuriou great gant guin ardand;
n'euz netra goassoc'h evid ar boan bouel-
lou. Dalc'hit prob ha nead ho tiez, ha
pellait diout-ho kemen a helfé lorri ann
ear vad enn dro dez-ho. Bep mintin,
digorit ho torojou hag ho prenestou evit
chasseal ann ear fall, ha ranevezi ann
ear vad.

Tolid evez euz ar vrumenou teo ; ne zalc'hit ket var n'oc'h a zillad g'leb ; ne gouskit morsé er meaz ; ha dreist peb tra, var ann douar fresk pe g'leb.

Ar pez a renker da ober pa gommanser klenvel, evit mirout deuz ar c'holéra da vontlarkoc'h, pe, da viana, sikour ar re glan da barea essoc'h goude-ze gand ar remejou a vezo roed d'ez-ho.

E veza ne baker ket ar c'holéra ann eil gand egile, ann dud a galon vad a hell, heb aoun ebed, kemeret soursi euz ar re glan, ha roi dez-ho ar remejou kenta pere a zo simpl-bras hag eaz da roi a bar-feted.

Cetu aman ar merkou kenta eus ar c'hlenved : ar stomok a deu da veza pounner, koll a rer goud evid ar boued, ar bouellou a deu da glenvel ha da gro-zal, hag ar c'hof a deu da danoat.

Ar merkou-ze purvuia a zo nebeud a dra ; nez enn eun amzer a g'holéra e renker toll evez, ha toll evez mad.

Cetu aman ar pez a renker da ober : dibri nebeud, pe guell, chom eb dibri ;

en em c'holo tom ; en em lakaat er guele,
ha klask e peb fesson c'houezi a c'houezi
dourek. Eyit kemen-se, eva aliez tassadi-
gou tizan great gant thé, sos-munud,
kamomill, till, etc.

Ma ne heller ket tréchi ann danouenn
gand an tizan-ze, e renker roi lavaman-
c'hou great gant dour riz, pedour amidonn
mar da ann denn klan aliez var vez ara-
bid ev roi dez-an nemed eur c'hard lava-
man goude bep gouec'h.

Mar teu an denn klan da ristoll, da
gaouet kredien, da gaouet riou de dreid,
de zaouarn, neuze a vezo red el lakaat
enn eur gouele tomet mad araok hag
entre diou vallin c'hloan, ha lakaat en
dro dez-han kals boutaillou lun a zour
tom ; lakaat var e stomok hag et gof ser-
viedi pe palastrou ann tomma possubl ;
frota e vemprou gand eun tam flanell
tremped er guin ardand kamfred ; roi
dez-han, bep anter-heur, eun anter tassad
tizan deuz ann hini hon euz komzed ; ha,
mar dev red roi kals tassadou tizan tom,
roi ivez, amzer da amzer, bannaou dour
ienn entre ann tassadou tizan tom, hervez
sec'hed ann hini klan.

Palastrou great gant moutard, ha lakeet, brema var ar c'hof, goudé var ann treid, a zo mad braz evid ober d'ann domder sevel et korf ann denn klan. Ann domder eo ar merck serten e ra vad ar remejou, hag e c'heller para.

Mar teu, en desped d'ann oll remejouse, ar c'hlaz da gregi e memprou ann hini klan, mar teu e gorf da sklassa, mar teu e visaj hag e zaou lagad d'en em denna, mar teu e vouez da zen plaad, e groc'hen da c'hlaza, e gorf da dreutaat buan, etc., e renker neuze labourat muioc'h da ober d'an domder sevel.

Kemen a ma vezo possubl eur medicin en em zalc'ho e peb meri evit servic'h ar re glan a helfe kaout ezom eus ho avizou, eus ho remejou.

*Goueled hag approuet gand ar Prefet
euz a zepartaman Finister,*

BRISSOT-THIVARS.